

AR MALVRAN HAG AL LOUARN.

War doun *an tra la la*:

Un devez ar Malvran , war eur wezen klujed ,
 A zalc'he enn he veg eur grampoezen fritet ,
 Pa zeuz al Louarn didennet gand ar c'houez ,
 Hag a gomsaz out-han'vel-man dre c'hoaperez .

War doun ann tra la la *(bis)*,

War doun ann tra deri dera tra la la:

Ha de-hoc'h , va Aotrou , penaoz a reomp-ni ?
 Trugarez , Alanik , ne c'houitann ket ; na c'houi ?
 Va bugale ive , nemed ar bihana ,
 A zo gwgal ziñerned evit ann deisiou-ma .

War doun , etc.

Doue ! va c'halounik , c'houi a zo fichét mad ;
 E Paris eo , m'hen tou , a brenid ho tillad .
 Ia-vad , a lavaraz rak-tal d'ar godiser ,
 Hac a roaz d'ez-han hano he gemener .

War doun , etc.

Mar d-eo kaer ho mouez kemend hag ho chupen ,
 Re'z oc'h , feiz d'am douchik , d'ar c'henta kanerien .
 Kanit 'ta d'in , mar plij , eunn draïg , eunn netra :
 A viscoaz'nn ho tiad oe'r c'hanerien gwella .

War doun , etc.

Kerkend ar paour kez sod , heb gortozi pedenn ,
 A ganaz a c'hrad vad eur sounig Iann ar Gwenn ,
 Hag , evel ma'z co red , evit gallout kana ,
 E tigoraz he veg , hac he damm da goeza !

War doun , etc.

Neuze al Louarnig , ne glaske nétra ken ,
 A lammaz war-n-ez-han , 'nn eur c'hoarzin a boez
 Goude e lavaraz : me'm euz ho koapeet ! (penn ,
 N'oc'h ket guisket kaer na kana n'ouzoc'h ket ,
 Kana ann tra la la la .

Pa glevaz kement-man , kounared ar Malvran :
 O droug-eur ! eme-z-han , berzed eo ann emgann !
 Paked ounn , laeret ! d'ann diaoul ann tonkadur !
 Kosa ar Malvrini tremen 'vit krouadur !

War doun , etc.

Chetu , 'me eul lounker , kentel ar ganaouen ,
 Brini bihan ha braz , dalc'hid-hi enn ho penn :
 Ne'z eo na fur ma mad (ec'h hellid her c'hridi),
 Pa gereur ar c'hrampoez , kana enn eur zibri .

War doun , etc.

Y. T.

(Perc'hentiez Erv. Tanguy).

AR MALVRAM VENJET.

Hevelep toun.

Choui 'anav kanaouen ar Malvran goapeet ,
 Chetu diwar-ben ze kelou ha n'ouzoc'h ket :
 Deach p'oann o tremen dre greiz coad ar Medig ,
 E weliz al Louarn gourvezet maro mik .

war doun , etc.

He dad , ve vam , he vreur , he c'hoar , he gendirvi
 A oa enn-dro d'e-z-han , oll oc'h huanadi ,
 Fichtre ! 'me'l louzaouer , louarn a wiziegez ,
 Mouged eo bet Alan gant re gofad krampoez !

war doun , etc.

Pa ho doe paouezed he gerend da wela ;
 Hasta a rejont prim da vont d'hen douara ;
 Hag al lern e kanyou, dek ha kant a weliz ,
 Eun eur vont daou ha daou , gane : *De profundis.*
 war doun , etc.

Arrued woar he vez , an holl a zaoulinaz ,
 Hag an Aotrou ar maer , 'nn eur wela a gomsaz .
 N'ouzounn ket he lavar, hogen pez zo gwir mad ,
 Holl gant liennennou 'zechent ho daoulagad .

war doun , etc.

Brao ! eme ar Malvran , klujet war eur wezen ,
 Chetu maro'll lacr , ha n'em euz neb anken :
 Skrapet'n euz ha lounket va c'hrampoezen fritet ,
 Doue'n d-euz-han gwanet , ha chetu me venjet .

war doun , etc.

Kement-man a ziskouez penaouz tra ann nesa ,
 Laered , a ra gaou , eleac'h frouceza :
 Ma vije'n enr vired Alan ouc'h skraperez ,
 Ne vije ket maro gant re gofad krampoez .

war doun , etc.

Y. T.

(Pere' hentiez Erv. Tanguy).

AL LOUARN CASTIZET.

Hevelep toun.

Goude beza debret krampoezen ar Malvran ,
 Enn eul lemel he dok , e tilec'haz Alan .
 Daou euz he vinoned he c'hortoze tostik ,
 Da bere lavaraz : arru eo Alanik .

War doun , etc.

Evid danevella he dro d'he vinoned ,
 Dindan eunn avalen gant-ho oa azezet ,
 Pa zeuaz da gregi enn-han eunn drouk kof braz
 'Nn eur zerc'hel he vragez , a du prim e redaz .

War doun , etc.

Evel ma c'houzahve gwall boan gand ar gwentrow,
 Malvran ha krampoezen 'roe d'an holl ziaoulou ;
 Neuze e lavaraz : ne vezomp re laouen ,
 O rula war zouar c'houlenne *jigoden..*

War doun , etc.

He hanter-tiegez , 'vit rei d'e-z-han skoazel ,
 A zeuaz tta gant-hi war vreac'h ho buguel :
 Pa zeujez da vervel , eme-z-hi , va fried ,
 Me choumo leal d'id , m'hen tou war va c'henet .

War doun , etc.

Ar Malvran a heulie al Louarnig a-bell ,
 A gomz out-han 'vel-man , war eur c'hiravaz p'hen
 gwel :

Abarz nemeur , sod paour , da Fanchon pe Gathou ,
 Da groc'hen ker bleveg a raio manegou ;

War doun , etc.

Alan a lavaraz gant fae : falla labouz ,
 Kavala eur c'lanvour 'zo ober eur *marmouz* .
 Gant da grampoezen fall e varvann kontammed ,
 'Barz er varn diveza e vezi tamallet .

War doun , etc.

En eul lavaroud ze Alan a dremenaz ,
 Hag ar Malvran venjet be njij a gemeraz ;
 Minonet all Louarn à reáz le-douet
 Ne zebrjent birviken foeltr tamm krampoez fritet .

War doun , etc.

Gwall-zarvoud al Louarn aziskouez d'imp sklermad
 Al laer kastizet abred pe divezat .
 Kent hep diner ma mell choumomb er vuez-ma
 Evit dont da guemer birviken tra'nn nesa .

War donn , etc.

Y. T.

(Perc'hentiez Erv. Tanguy).

DIHUN

AR PAOTR-KOZ LAFONTAINN.

(Enep-tra la la, gant kent-skrid ha kentel).

KENT-SKRID : He zistro da Wengamp.

TOUN : *Larifla fla fla.*

Lafontainn ann deiz all	A oe war ar Valy.
A asbevas raktal,	Larifla fla fla.
N'n eul lavaroud : Doue,	Leoned a gavaz,
Da valea'z ann-me.	Ha razed e rumm braz,
A dall-dor ar veret,	'Lavaraz enn han :
Heulaz'nn hend houarned,	Me 'zo aman,
Hag enn daou lamm pe dri	V'holl loened a welann.

Souez ann tad Lafontainn.

TOUN an tra la la la.

Eva reaz chaud-chaud 'ti Bipì al Levrer,
Hag a ieaz kerkend e-treze Sant-Salver :
Petric'glevan, 'me-z-han ? Oh ! darvoud truez !
Piou am wall-gas 'vel ze ? an aotrou Vassorus.

War doun, etc.

Buanegoz an tad Lafontainn.

Va aneveded paour, da bere'm boa roed
Em amser eunn nebeud a skiand, a spered,
Goud'eiz uguent vloaz ho gavann holl deuet
Sod evel tud nevez, diod evel tud desket.

War dounn, etc.

Klevoud a rann dre hol! penaoz, 'baoe va mare ;
Eo krenvaet meurbed ar c'hanerien 'nn ho pro ;
E komser a Auber, Rossini, dall ar Gwen...
Ne glevann kouskoude nemed eunn doun hepken,
Hini ann tra la la , etc.

Goude holl, mar displij d'Aotrou Victor Hugo
Beza kanet gant Blach ha dall a Blourivo,
Perag e vijenn-me, o tonkadur nec'huz !
Kanet gand eunn Oudot, Hoffmann, pe Vassorus ;
War doun, etc.

*He zonedigez enn Auteuil, e pe leac'h en doa skrived
at Louarn hæg ar Malvran.*

Eun divez, enn Auteuil, pehini 'zo va bro,
Hag a vir e'hoaz hirio gant halc'hder va hano,
'Bars em ru Lafontainn, e welann Musardig
Oper d'ann holl dansa gant Malvran-Alanik.

War doun, etc.

En em gavoud a ra gand ann A. Musard.

Musardig', er meaz euz he di ez ee,
'Chouennaz digant-han a be vro a zeue,
— Euz ar bed alk, 'me-z-han. — Feiz, me ne zeuann ket.
— Kouskoude ann dud holl 'lavare oac'h paket.

War doun, etc.

Lavar ann tad Lafontainn.

Va c'halon, 'me'r paotr-koz, va c'halon zo mantret,
O weloud ounn 'vel-ze gane-hoc'h dispennet;
N'oc'h ket, war va feiz, ijinus emm ho pro,
Pa renkit, 'vit beva, dihuni'r re varo.

War doun, etc.

An A. Musard a lavar d'he dro :

C'houi'm laka souezet, paotr-koz, gand ho komsiou :
Didamall ounn, me ra dansa va fierrojou.
Deuit'a d'ho gwejoud, o val minonik'kez,
Ha c'houi 'zanso ive, m'hen tou, kend ann divez.

War doun, etc.

RENTEL.

'R paotr coz, a vousc'hoarze, a lavaraz gwevet:
Francisien, gaou hoc'h eus da zaotra ho spered,
N'adgrit ket ho tnd-koz, pe, gand ho pugale,
C'houi a hellse, d'ho tro, beza adgrèd ive.

War doun, etc.

Y. T.

(Perc'hentiez Erv. Tangay).

KIMIADOU

eur paotr iaouank d'he vro.

O va Gouarek ker , o va bouc'hig ,
E kuitaann ar gompezennig ,
E pehini red ar Blawet
 Sioulig ,
E kichen eur grec'hen a het
 Meurbed .

N'ez inn ken war venez Rosquelfen ,
A zo huelloc'h 'vit da draonien ;
D'abardaez ann hegleo
 Birviken
Ne lavaro ken va hano

Eno.
Ac'hano e weleur displeged
Eur vro gaer , hogen dihentet ;
Gouarek , koajou ha koabrennou
 Tro-zouget ,
Pere 'zav enn troidellou
 'Nn envou .

O veza'nn amheol d'he zivez ,
E tiskennenn diwar ar menez ,
Va c'haloun gredik leun a rad
 War ar pez
Ouc'h pehini 'stage'nn eur-vad
 Gaouiad .

Neuze ma vije d'in lavared
E vijenn euz ti va zud kased
Eunn devez gand ann darvoudou
 Milliged ,
Hag e redjenn e pell-vroiou
 'Nn henchou ;


Me am bije bet ankeniou ;
 Me am bije skulet daerou :
 Gouarek , 'vidoun'n devo bepred
 Dudiou , *
 Gouarek vezo gan-en karet
 Bepret.

Kouskoude , kenavo , bro kared ,
 Aochou'r Blawed , o riblou bleunied ;
 Astennid ho tourn' , tad keaz ,
 Me ho ped ,
 War ho mab a ielo warc'hoaz
 Pell braz.

O va mami , pa zeuot da wela ,
 'Nn eur zorlot a breur bihana ,
 Sellid ouc'h ar Wer'hez santed

Zo ama ,
 Pedid-hi evid ho pugel
 Et pell. Y. T.

(Perc'hentiez Erv. Tanguy.)



Gouarek vezo gan-en karet
 Gouarek

Moulet-e Guengamp gant Y. TANGUY.
 Moulet-e Guengamp gant Y. TANGUY.